



## CHANSON NEVE

Voar sujet ur Filouter fin en deus tromplet  
é Hollis : *Voar un ton neve.*

**M**E ho supli, oll tud yaouanc, da zont  
da glevet  
Ur Son meurbet divertissant neve composer,  
A so gret da un den yaouanc, ur filouter fin,  
Mar ententez, ar farç plesant a rai deoc'h  
c'hoarzin,

Arabateo, compagnuez, ober diountan :  
Bete re a filouterien so dre ar vro-mân ;  
Nemet hepquen avertissa an oll Hostisien  
Da ziouall na zuint da logea ar filouterien.

An den-mâ oa brao guisquet, un den a fa-  
çon,  
Me forach din e voa gunidic demeus a Leon :  
Squise voa er guær ; re vaguet meur a hini so,  
M'en deus laquet en e speret mont da redec  
ar vro.

E Montrouilles hac e Guégamp, e Treguer  
eo bet,  
E Sant Malo hac e Dinam hac e Sant Briec,  
Parrot ca o clasq e fortun, o poursu e chang,  
Arc'hant en devoa callet gantan ebarz en  
abendang.

Baleet en deus bete Paris ar filouter fin.

A

2

**E** yalc'h a fo deut da blada sur en alafin :  
Distroet eo bet d'an Naonet, ha bet e Roazon,  
Alafin eo bet manquet e bourvission.

**E**vel ma voa bet custumet da ober cher vat,  
**E**vit ar veich e voa maguet cals re zilicat,  
**E** quemerias effronteri da c'houlen logea  
**E**bars en un Hostaliri, n'oa diner gantâ.

**E**vel ma voa quer brao guisquet, en ty eo  
antreet ,  
**B**onsoir, emezan, ma Hostis, ha me vo loget ?  
**C**oania a fell din em pligeadur en ti-mâ fenos,  
**H**ac ive eva ur banne ebars em repos,

**S**ervicher , eme an Hostis, va mignon an-  
treeet ,  
**S**ervichet viot a dra certen ar pez a guerfet,  
Aseeit amân en ur gador equichen an tan ,  
**Q**uemericet ur banne da eva da gortos ho coan.

**S**ervichet oa ma mignon eus a guement mad  
A zesire tout e galon a draou delicat ,  
**G**uin Bourdel démeus ar guella hac ive guin  
Spaign ,  
Ha liqueur an excellanta tout d'ar map ar  
c'haign.

**P**a en devoe debret hac evet , c'hoariet e  
roll ,  
**D**'ar plac'h en deus lavaret ; diservichet an dol ,  
**T**ennet o plajou , boutailou , ives o cuerden ,  
**M**a c'haslet d'am c'hampr da gousquet d'ur  
guèle quempen.

3

Amâo e commanças nec'hi bremâ an den  
 yaouanc,  
 Penos e paeje e Hostis, n'en doa quet arc'hant :  
 Evet emeus guin, emezân, ha gret emeus  
 cher,  
 Petra rin-me evit paea, n'emeus quet un dinier.  
 Epâd an nos en e vele e oa chagrinet,  
 O songeal en e baemant n'alle quet coussquet :  
 N'allin quet mont eus an ti-mân certen e nep  
 guis,  
 Ma ne allân caout moyen da baea an Hostis.  
 Guelet bremân ar finessa eus ar filouter fin :  
 Un diou po deir heur quent an de e yeas er  
 jardin ;  
 Buan ezeo bet comancet da doulla an douar,  
 E vragou en deveus plantet en toul-se ractal.  
 Pa en devoa enterret e vragou, e ycas en  
 e vele,  
 Neuse en em laquas da gousquet da gortos an  
 dé ;  
 Gout a re mat ar filouter e teuje a ben  
 Da ober d'an Hostis paea an escot pen-da-ben.  
 Anternos vintin pa savas evit partial,  
 Pa na gave quet e vragou, e commanças crial :  
 Fors, ma mignonet, emezân ; sicour, me ho  
 ped,  
 Ha ma arc'hant ha ma bragou a so tout laëret.  
 An Hostis hac an Hostises d'an ec'h a so  
 pignet :

A ij

Chomet e repos, den yaouanc, petra se  
c'hoarveet ?<sup>4</sup>

Hac e ve collet ho pragou, an dra-se ne nerra,  
Arabat eo hon dicria, ny a ya d'e baea.

N'en deo quet hepquen ar bragou am gra  
chagrinet,

Ma oll arc'hant a voa ennân : me a so ruiner,  
Beza voa en arc'hant hac en aour melen  
Evit ato tri-uguent pistol ha daou scoet oc'h-  
pen.

Fouillet voa bet dre an ty ar servicherien,  
Mevel, mates, potr marchossî, bugale oc'h-  
pen :

Eon a voa sur oc'h e affer, a grie bepret:  
Penaus e zin-me d'am c'halter, tout e zon  
laëret.

Ententet, emezân, Hostis, ebars e ber  
langach,

Ma na rentet dime ma bragou, me rei deoc'h  
domach ;

Evidon me gavo testou, pa vanque cant din,  
Penaus ne oan quet divragou pa zuis en o ty.

Evidon-me so den honest, mar deus er  
c'hontre,

Ne fell quet din ho ruina, pell dioc'h que-  
menie ,

Rentet din ur bragou mezer ha tregornt pistol,  
Me bardono deoc'h an anter, ne gollin quet  
oll.

5

An Hostis hac an Hostises eus a galon vat  
 A gont dezàn tregont pistol tout en ur yal-  
 c'hat,

Hac ive ur bragou neve eus a vezet Saos;  
 Eon a sorti joaus neuse pa voa mat e gaos.

Rei a reujont da zijuni dezàn quent partial;  
 P'en doa pardonet an anter, o doa joa ountâ;  
 Pront hep sellat en dro dezàn ezeo partiet:  
 Quenavo, Hostis, emezân, ar c'henta guelet.

Abarz nemeur goude an Hostis o terri ar  
 jardin,  
 En deus cavet en douar bragou ar potr fin :  
 Eon o comanç da grial eus a boues e ben,  
 Houmâ so tro ur filouter, ha me so un azen.

Quement Hostis so er vro-mân a ranque  
 doner  
 D'ober goab ac'hanon; bremâ me so brao  
 tier,  
 Collet emeus tregont pistol, ur bragou mezer  
 Ha c'hoas emeus roet da goania ha dijuni  
 d'am Jaér.

Bremân e teuân da avertista an oll Hosti-  
 fien  
 Ma tiouallint dre quememâ ous ar filouterien :  
 Arabat eo da zen en em facha evit e glevet,  
 Dime ma-unan ar goaffa, me fo goall diet.

*F I N.*